

E-BARZH AR GÊR A GAREIS

É-barzh ar gêr a Gareis, ma zo or plac'h yaouank
A neus daou, tri amourous, 'ouiv ket peshaiñ 'neus c'hoant

Ar c'hentañ 'zo keginer, an eil 'zo pôtr ar gampr
Hag an dri 'zo keréouer, henn'zh ê 'n hani 'neus c'hoant

Hañw lakäs ober dezi on newê boutow-lêr
Ha pa 'nâ gwreet ar bôtow 'oa weet t'o c'hass t'ar gêr

'N or wiskiñ dêi ar bôtow, ar pôtr 'neus lavaret
"Me 'garefe, koantennig, mont sam'noc'h da gousked"

« Me 'garefe, koantennig, mont sam'noc'h da gousked
É-barzh or gampr d'o pales, 'n or gwele koad koaret »

« 'Barzh or gwele koad koaret, én or gampr d'o pales
Hag a beb korn deusoutoñ on awal orañjes »

« Hag a beb korn deusoutoñ on awal orañjes
Ar liñseniow warnezoñ brodet gant danteles »

« Ar liñseniow warnezo 'vo gwreet gant lien fin
Ha war ar lein deusoutoñ 'gano on êstig bih'n »

« Ha war ar lein deusoutoñ on êstig 'vo kane
'Wid lakad an dud yaouank da vid joaius ha gê »

« - Kanet-hu, êstig bihen, kanet tin-me ho son
'Wid ma lampo an ôtrow war barlenn an itron ! »...

DANS LA VILLE DE CARHAIX

*Dans la ville de Carhaix, il y a une jeune fille
Qui a deux, trois amoureux et ne sait lequel prendre*

*Le premier est cuisinier, le second valet de chambre
Le troisième est cordonnier, c'est lui qu'elle désire*

*Il se mit en tête de lui faire des souliers neufs
Quand il eut fini les souliers, il s'en alla les lui porter*

*En lui chaussant les souliers, le garçon lui dit
« J'aimerais, beauté, dormir avec vous »*

*« J'aimerais, beauté, dormir avec vous
Dans une chambre de votre palais, dans un lit de bois ciré »*

*« Dans un lit de bois ciré, dans une chambre de votre palais
Avec à chacun de ses coins une orange »*

*« Avec à chacun de ses coins une orange
Les draps qui le couvrent brodés de dentelle »*

*« Les draps qui le couvrent seront de toile fine
Et sur le dessus du lit chantera un petit rossignol »*

*« Sur le dessus du lit, un rossignol chantera
Pour réjouir et égayer les jeunes gens »*

*« - Chante, petit rossignol, chante- moi ta chanson
Que monsieur saute sur madame ! »...*